

1

Poanioù Herve Volant yaouank

Diaes eo ar vuhez evit un den evel don hag a gustum bezañ direnket ha skoet gant an nec'hamant gouzañvet gant tud all, tud a anavez pe tud dianav dezhañ, ne verna ket. Lod a c'hell bevañ e-touez tud all hep santout en o askre ar pezh a sant o amezeien ; gwell a-se evite marteze, mes 'm eus aon ez eo e-mesk ar re-se e kaver ar muiañ tout a baotred hag a verc'hed yaouank kozh trenket o avu, a brezegennerien vouzar hag a varnerien reut, hag an holl re-se ne reont ket avi din. Ur ger zo bet savet en alamanteg evit ar c'halloudezh da c'houzañv ivez ar pezh a sant ar re all, ar ger *Einfühlung* ; e brezhoneg e c'heller krouiñ ar ger *empatiezh*, diwar ar gregach *empathia*, dre ar galleg.

An *Einfühlung*-se a santan ivez, lakaomp, pa welan ur yourc'h o treuziñ ur wenodenn d'ar c'haloup dirazon, ha pa glevan ur stropad chas sot iset gant chaseourien ken sot all, o hesal hag o ren o reuz hed daou pe dri brad alese, o klask e c'hwezh, pe pa welan, un nozvezh glav ouzh gouleier ma oto, ur sourd sonnet e-kreiz un

hent, ma rankan chom a-sav ha taoler anezhañ en toufflez tostañ. Ha n'eo ket ouzh al loened mut hepken : ar memes tra a santan c'hoazh pa welan un den kropedik o klask renka-renkaik e garr-tan a-souz e kêr etre div oto all hag o rankout adkomañs teir pe beder gwech e vaneuroù a-benn ober an hanter eus un dra bennak.

Empatiezh a santan c'hoazh, hag an dra-mañ eo ar gwashañ evidon, gant ur muzisianer hag a rank dont a-benn eus e lodenn c'hoari, pa ouzon eo ul lodenn leun a bejoù stignet amañ hag ahont gant ar sonaozour. Empatiezh a santan bep gwech, lakaomp, gant ar solist a rank c'hoari concerto Lalo evit ur violoñsell : er pezh sonerezh-se, dreist-holl el lusk kentañ, en em sant meur a solist evel ul loen spontet-mik, lapin, gad, bizourc'h, o klask tec'het dirak ur vandenn chas o harzhal war e lerc'h.

Kuitaet 'm eus an ti-skol muzik bremaik gant ur pezh dic'hoanag o c'hronnañ ac'hanon : evit ur c'hoñsert a vo c'hoariet da vare Pask, dre vras, eo bet choazet concerto Lalo, justamant, ha piv en do an enor da c'hoari al lodenn solo, 'soñj deoc'h ? Ma ches.

Klasket 'm boa lakaat pennoù bras ar skol da zistreiñ diwar o soñj kentañ, kinniget 'm boa concerti all ha ne raent ket kement a nec'h din, gant Haydn, Saint-Saëns pe Boccherini, betek hini Dvořák zoken, mes ne oa netra d'ober ; nann, nann, Lalo a faote dezho kaout, dre m'emañ batisoù ar skol ru Lalo, dre m'en deus savet hemañ an opera *Le Roi d'Ys* hag emaomp sañset o vevañ nepell diouzh al lec'h ma oa kêr-Is gwechall.

Emaon o ruzañ ma zreid e kêr, a-hed ar c'haeoù, o stlejan ma violoñsell ivez. Gouzout a ran em eus paket trawalc'h a varregezh evit c'hoari an oberenn-se, mes ur varregezh all zo stag deus ouzhin ivez, hag eo en em

lakaat e kroc'hen ur c'had kerkent ha ma voulc'hin lusk kentañ concerto Lalo, hag ouzh ar pleg-se ne c'hellin ket miret. Selaouit mad an oberenn-se, ma ne gredit ket ac'hanon : goude un hanter vunutenn gant al laz-soniñ o tigoriñ al lusk, eo d'ar solist da stagañ ganti, c'hoari a ra tri, pevar muzul, ha kerkent, al laz-soniñ o tregerniñ a-dreñv e gein, evel ma vije ur vandenn chas o harzhal, iset gant paotr e vazhig ; ha setu ar c'had o tec'het kuit hag o klask un arroudenn all ; un nebeudig muzulioù, hag harzhadeg adarre ; amañ e tigor un estreved all n'he deus ket esaeet : daou pe dri lamm warnañ, ha raktal ar chas o chalpat. Strafuilhet ar c'had, gwasket he c'halon, stegn he nervennoù, kerkent hag al lusk kentañ : nann, ne c'heller ket lakaat ac'hanon da c'hoari ar c'honcerto-se.

Penaos e rin evit heuliañ al laz-soniñ, gant ma c'halon o lopañ pennfollet, ma gwazhied em daouivridig o talmat, ar c'hwezenn war ma zal ha ken buan all war ma bizied ivez ? Aes e oa d'ar re all lavaret em boa graet studioù muzik uhel er c'hêrioù bras, bet prizioù e broioù estren, ha ma dismegañsiñ war-lerc'h ; pa 'm eus komzet eus ar c'had a santen evel pa vijen bet en he c'hroc'hen, an hanter eus al laz-soniñ n'en deus ket komprenet, an hanter all n'en doa ket selaouet, ha neuze em eus gwelet Dione, un alto, oc'h ober un diverrañ eus ar pezh evedon o paouez kontañ, da lâret eo he deus graet gant he daou viz yod evel div skouarn hir ur c'had evit hec'h amezegez Adeline, he deus respontet raktal a vouezh uhel goude un damsell warnon :

— Bihan eo e zivskouarn, kentoc'h.

Adeline, sed aze unan ha n'eo ket prest c'hoazh da gompren petra eo an empatiezh ha nebeutoc'h c'hoazh d'en em gavout e kroc'hen hec'h amezeg.

Hag al labour ! Kas da benn studioù war ar fizik e-skeud c'hoari gant ur violoñsell n'eo ket deus ar re aesañ d'ober ; daouzek eur labour bemdez, da nebeutañ. Evel ma lavar ma zad : ur gwir manac'h out deuet da vezañ, ma faourkaezh Herve ! Ur gwir manac'h hep mignoned, hep mignonez, hep ribouladegoù gant kamaraded, hep amzer da vont da welet na film na pezh-c'hoari e salioù kêr.

Tud all o deus bet kaset da benn ar muzik hag ur vicher all war un dro, a lavarit-c'hwi peogwir hoc'h eus en lennet pe klevet. Christian Binet zo anavezet evit bezañ war un dro sonaozour ha treser ar BDoù *Les Bidochon*. Ha komzit din bremañ deus Micheline Ostermeyer, ya, pemp eur piano bemdez, pemp eur sport bep sizhun, diouzh ar pezh a gonte, div vedalenn aour er c'hoarioù olimpek hag ur vuhez labour oc'h ober koñsertoù e pep lec'h goude. Ur plac'h evelti a vez kavet ur wech bep kant vloaz war ar bed, ha c'hoazh ! Ha Jacques Monod, rener laz-seniñ klasel ha Priz Nobel e biologiezh...

Da gac'hat, sellit ! Baleet 'm eus, baleet 'm eus ha bremañ n'ouzon ket re e pelec'h... Ba, evit ur wech em bo graet un tamm sport...

Taolet zo bet pour ha diskarget mel warnon gant al loa vras gant ar soñj lakaat ma *Einfühlung* ha ma aon rak oberennoù Lalo da steuziañ. Lâret din e oan an hini barrekañ war ma benveg, ha n'eus forzh penaos ne oa ket monig a-walc'h e kef ar skol evit pediñ ar c'h-Capuçon pe Yo Yo Ma da zont da c'hoari, ha skortoc'h e vefe ar yalc'had a-berzh an ti-kêr er bloaz a zeu c'hoazh. Dre ma 'm boa fent hag ijin e vefen gouest d'en em dennañ, mod pe vod, da lârsont gwitibunan, evel ma 'z on bet gouest d'en em dennañ a-raok, ha pa 'm befe da c'hoari an tamm diaesañ tout bet skrivet morse evit ur violoñsell.

* *

*

Tapet 'm boa ma zamm brud seizh pe eizh vloaz zo, pa oan c'hoazh el lise, un nebeud devezhioù a-raok arnodenn bachelouriezh ar galleg, ma 'm eus soñj mad. Un eur istor hep fin ebet dezhi, siwazh, evel re alies (hir eo ar beurbadelezh, dreist pep tra pa dostaer ouzh ar fin, evel ma lavar Woody Allen). Kement ha lakaat an amzer da dremen un disterad buanoc'h, evedon o sellet er-maez gant ul lagad dievezh war ar steudad gweturioù a oa renket penn-da-benn an alez, en o zouez Citroen BX kozh Gérard P., hon c'helenner fizik, ur machin tost tregont vloaz ma n'eo ket ouzhpenn (ar wetur ha neket G. P., rak hemañ en doa tapet kaout hanter vuioc'h evit se dija), merglet ha storlok, a oa bet kroget an tan en e geflusker e porzh al lise, hag a chome aze da gozhiñ abaoe un nebeud sizhunioù ; hon fizikour, yaouankaet en un taol, a deue bremañ gant un oto nevez-flimm-flamm. A-greiz-tout, e oa degouezhet kamion ur minter pe ur pilhaouer hag a zastume ivez kozhhouarn, hag a dostae gwestadik, gant ar blenier o sellet pizh ouzh ar gweturioù, ha kerkent em boa divinet e oa evit kas ac'halenn peñse ar BX.

— 'Hell 'ta pet'a !... Aet on, a lavaran da'm amezeg ha mignon Klet ar Berr, deuet eo ma violoñsell ganin hiziv ha fiziet 'm eus anezhañ er porzhier, deus ivez buan ha pourchas ur gador din.

Ral a wech e teuan d'al lise gant ma benveg muzik ; moarvat e oa peogwir e oa fin ar bloavezh-skol e oa deuet ganin, ha bep gwech e laoskan anezhañ er borzhierzh. Klet n'eo ket chomet da dortal na da sevel goulennoù, strinket hon eus er-maez eus ar c'hlas, war un digarez

mogedus ; un nebeud eilennoù goude e oan dirak kamion ar pilhaouer gant ma violoñsell, dres pa oa Klet o tont d'ar c'haloup gant ur gador. Ar minter hag e vous a oa c'hoazh o wiriañ e klote niverenn varilh ar BX gant an hini a oa merket war ar gartenn c'hris a oa gante ma 'm boa dispaket ma benveg diouzh e c'houhin hag e oan krog da c'hoari un heuliad gant J. S. Bach. Labour gorrek hag aketus a rae an daou gozhhouarnour : arabat e oa implij o c'hrigi n'eus forzh penaos, lakaomp torriñ sklasennoù an oto ha laosker gwer torret e pep lec'h goude-se.

Hag e kendalc'hen gant Bach par ma c'hellen ; mont ha dont a rae ar wareg war ar c'herdin, kaeroc'h evit biskoazh, ur boem ! chom a rae an dremenidi – goude ma ne oant ket gwall stank – da selaou, souezhet an tamm anezho, ha setu Klet o lavaret din goude ur pennad, laouen evel ur buruig pintet war ur post-kleud hag o sellet ouzh pennoù ar buzhug o tont er-maez eus an douar tro-dro dezhañ :

— Ohuuu, Herve, bremañ eo leun-tenn ar prenestroù gant pennoù liseidi o sellet ouzhimp-ni hag o c'hoarzhin ! Cheyeiyei, nag a reuz hag a ouach gante !

Klevet a raen, kreñvoc'h eget son ar violoñsell, trouz yaouankizoù chichant a-dreñv ma c'hein tra ma tibraded ar wetur gozh da bozañ anezhi gant damant war blatenn ar c'hamion. Dalc'het 'm eus gant ar *sarabande* am boa boulc'het, ha neuze 'm eus ehanet, dre ma oa ar pilhaouer o loc'hañ kuit gant e garg. Tro-dro din e oa un ugent bennak a dud, skolidi ha kelennerien, o stlakal o daouarn, ha dek pe ugent gwech kemend-all er prenestroù oc'h ober ur pezh talc'hari.

— Un *happening* a-feson e oa, eme mouezh ur gelennerez em c'hichen. Ma gourc'hemennnoù deoc'h, paotr yaouank.

Hag evedon o tastum ar violoñsell en e c'houhin endro, ma arvesterien dostañ oc'h ober ur c'helc'h tro-dro din, pa oa deuet an eil rener da welet petra a oa pennkaoz d'an dizurzh a oa o ren en e lise abaoe ur c'hardeur.

— Petra 'c'hoari ganeoc'h oc'h ober an termaji-se, ken ne c'hell den ebet ken labourat amañ ? a c'houlenn ar paotr, tomm-ruz dezhañ gant ar bec'h.

Ha neuze ur c'helenner kozh a-walc'h o respont dezhañ :

— A, Aotrou Garreau, lakait ho memor da labourat, unan eus an darvoudoù pouezusañ e fin an ugentvet kantved zo tremenet ouzh trouz ur violoñsell hag a roe ivez muzik Bach da glevet.

Chomet eo an eilrener da sellet ouzhimp gant un aer alvañ.

— Geo, geo, gwir eo, ur bajenn istor zo bet troet evel-se, ouzh sonerezh Rostropovitch, a ouzhpennan.

Allaz ! Garreau a oa eus ar ouenn nevez a renerien lise : gouzout a reont mad a-walc'h diouzh Djokovitch hag Ibrahimovitch, mes arabat komz dezhe eus Rostropovitch pe Chostakovitch. Hag un istor mogerioù kouezhet pemp bloaz warn-ugent zo ! Piv en o zouez en deus dalc'het soñj eus se ? Ma, ar ouenn gozh he doa studiet a-dreuz hag a-hed Racine, Corneille hag al liperien-botoù all eus hon lennegezh, mes da nebeutañ o doa tapet ar blijadur da lenn ha da glask kompren skridoù a bep sort goude-se hag e oant gouest da dennañ o mad dioute. Mes ar renerien eus ar ouenn nevez ne gavont ket amzer da lenn na da zeskiñ netra, e-feson, CPE a chomo *Conseiller Principal d'Education* e empenn Garreau evit ar wech tout, ha n'eo ket prest na tost an teir lizherenn-se da zont da vezañ Carl Philip Emmanuel Bach. Kolletoc'h-kolletañ e oa hon eil

rener, da c'hortoz, dirak daveoù boutin d'an arvesterien hag estren dezhañ.

— Pa 'n deus gwelet ar paotr yaouank-mañ e oa ar bajenn ziwezhañ o treiñ evit oto gozh hon kenvreur Gérard P., a gendalc'h ar memes kelenner, eo deuet d'ober un tamm kundu dezhi gant e violoñsell. N'eo ket gwir, ma 'haotr ? Hag ouzhpenn-se e c'hoariit dispar an heuliad-se, a gonklu en ur sellet ouzhin.

Neuze 'm eus remerket e oa bet tennet poltredoù ha filmet an abadenn gant meur a hini eus ar sellerien. N'ouzon ket pet *iphone* a oa deuet er-maez eus ar godelloù, en alez-mañ hag er c'hlasoù, e-pad ar c'hardeur-se, mes un toullad mat a oa dalc'het c'hoazh a-bouez brec'h ha pa oa echuet an abadenn, ha gwelet e oa bet e-pad pell amzer goude-se, e meur a lec'h e kreiz kêr, poltred ar c'hozh karr-tan o plavañ en aer, ha me dirazañ o soniñ. E sal fizik Gérard P. zoken e oa chomet spilhennet ar foto betek ma oa aet G. P. war e leve.

Abaoe an abadenn-se e oa chomet stag ouzh pastell ma roched ar brud em boa un tamm mat a fent hag un ijin birvidik, ouzhpenn ma barrezh gant ur violoñsell, hag an holl er Skol-vuzik, pemp pe c'hwec'h vloaz war-lerc'h, a gonte c'hoazh an istor-se d'ar skolidi nevez en em gavet eno en ur ziskouez dezhe al luc'hskeudennoù eus an darvoudig.

Ma, savariñ a ran, savariñ a ran, mes deuet on war droad betek amañ ha n'ouzon ket re e pesort karter on en em gavet. Ouzhpenn-se e oan deuet d'ar Skol-vuzik gant ma strakell gozh hag e vo ret din mont en-dro war droad gant ma benveg da adaptout anezhi.

2

Ha bremañ, Clara Kerloc'h o tigorin deoc'h he c'halon

Chomet e oan ur pennadig da gontañ kaoz gant Adeline, c'hoarierez violoñs, ha Dione, alto, hag aet e oamp goude-se da lipat ur bannac'h kafe en un ostaleri. E gwirionez ez eo selaou anezhe a raen, dreist-holl, evel kustum. Anav deoc'h, petra a oa bet etrezomp nemet komerachoù merc'hed yaouank diwar-benn ar Skol-vuzik, ar pennoù kozh a gaver en he fenn, ar choazoù a oa bet graet gant renerien al laz-soniñ, ar c'hoñsertoù pe ar festoù a vefe kemeret perzh enne. Gante eo 'm boa klevet, e-mesk traoù all, e oa bet dibabet evit al laz-soniñ ar c'h-concerto evit violoñsell gant Lalo, hag e vefe c'hoariet da vare Pask ha roet al lodenn solo da Herve Volant.

— Ma 'z pije gwelet ar penn distruj a oa deus Herve war-lerc'h, eme Adeline, ken e oan tost da gaout truez deus outañ !

Tost, he deus lâret. Mes tost ne dap ket, Adeline !

— Penn un den dic'houest da dalañ ouzh ar pezh a zo bet kinniget dezhañ ober, dres. Ha koulskoude eo abalamour d'e varregezh evel solist eo bet kemeret

evit c'hoari ar c'honcerto-se, n'eo ket ? a c'houlenn Dione.

— Barrek eo, evel-just, a respont Adeline. E meur a sal hag e meur a gêr vras e Beljik hag e Bro-Almagn en deus bet c'hoariet lodenn solo meur a oberenn, diouzh ar pezh am eus bet klevet. Pa zic'hañs deomp c'hoari gantañ en un trio pe ur c'h-quatuor, e santan mad-tre emañ ur bazenn uheloc'h evit an daou pe dri all.

— Ur bazenn ! a ziskrogn Dione. E c'hellez lâret div pe deir, hardizh !

Laosket 'm eus anezhe da varn Herve Volant diwar o ugent vloaz tremenet. Anavezet o doa bet anezhañ a-raok ma yafe war e studi sonerezh d'ar C'hêrioù Bras, pa ne oan nemet ur plac'hig vihan d'ar c'houlz-se. Me ne 'm eus ket bet tro da c'hoari gantañ gwech ebet abaoe e zistro, goude ma 'z on unan deus ar re zonezonetañ tout war ar piano er Skol-vuzik, hervez ar pezh a lâr an dud ; justamant, dre ma sonan gant ar piano, ne 'm bez ket tro da vezañ eilet alies gant ur violoñsell, na nebeutoc'h c'hoazh gant an hini gwellañ eus ar c'hoarierien. Ouzhpenn-se, dre ma eo pevar pe bemp bloaz warn-ugent ar paotr, n'eo ket techet da laosker e selloù da ruzañ war ur bisouzenn pemzek vloaz hanter evel don, hag a rank ober bemdez Doue gant fasoù leun a vurbu al liseaned, da c'hortoz gwelloc'h. Un doare purkator evidon ; en an' Doue, ma sikouret !

Kimiadet 'm eus diouto pa oa just Dione o lavaret d'eben, en ur gomz deus ar Volant :

— Ma feiz, ar memes penn a oa deusañ evel ma oa deus ma zad-kozh an deiz ma oa bet trec'het 5-0 Dynamo Plourac'h gant Lokomotiv Kergrist-Moelou.

Deuet e oa ur mousc'hoarzh din war ma diweuz o klevet pozioù Dione. Ma, kaer he deus honnezh bezañ